

*Moussa*

*Emañ trede torkad danevelloù Kristian Braz, 9 istor berr ennañ, o paouez bezañ embannet :*

Hent ar c'huzh-heol

Emañ beg-e-dok koulz hag e « vignoned » trafikerien war-lerc'h Kenan. Ne chom nemet un dra dezhañ d'ober : tec'hout war-zu ar c'huzh-heol, betek ti e vamm-guñv dianav dezhañ, aet diwar-wel bloavezhioù zo.

Just a gigolo

Deuet eo Enzo Portelli da gelenn e-kichen Nizza, ha prestig war-lerc'h d'ober koñverzh gant e gorf. Kontet e vo istor an nebeud mizioù tremenet gantañ eno ha fin kriz e vuhez gant un toullad tud bet anavezet ar paotr ganto.

Moussa

Petra ober gant ar repuad yaouank du dastumet gantañ war ribl an hent dindan ar glav-pil e-kreiz an noz, a soñj Alan, paotr yaouank kozh aet skuizh gant ar vuhez.

Zyklon B

Mont da vanifestiñ evit ar retredoù ? Ya 'vat, deomp dezhi, met pa ouzer eus feulster paotred Mari Robin ha pa vezer gwan e galon ha tapet gant ar berr-alan ouzhpenn...

Terapiezh

Ur plac'h yaouank kouezhet e deun he diwaskadenn a ya da welet un terapour... disheñvel.

Keraodren

Abaoe pell emañ Mark Abiven o chom e-kichen Roazhon. Mont a ra da Vrest evit e labour, digarez dezhañ da rentañ bizit d'e c'hoar gwallglañv war ar memes tro. Degaset e vo da soñj dezhañ eus fedoù kriz e istor e familh, ha ret e vo dezhañ kemer un diviz start.

E Penn ar Wern

Dont a ra Jañ-Bern hag e vignonez saoz Jenny d'ober anaoudegezh gant an daou goublad « skwaterien » deuet da chom en o c'hichen ha d'en em dommañ outo. C'hoarvezout a raio traoù avat, a lakao freuz en o buhez.

Erell

Kaset eo bet Errell d'ober ur staj en ur ger vras pell diouzh he zi. Erruet eno e klev e vo roet ur sonadeg gant Fred, karedig he yaouankiz. Petra ober ? Mont pe get ?

Hent ar marv mat

Galvet eo bet Nadia d'ober war-dro ur den yaouank war e dremenvan. Er vaouez oadet mat e tihuno santadoù dianav dezhi e-keñver ar paotr ar vuhez o tec'hout dioutañ.